




**DIAGNOSTIK  
STAD AR BREZHONEG  
E BRO SANT-BRIEG  
DOARE NEVEZET 2004-2009**

**POL STUDI HA DIORREN**  
ARSELLVA AR BREZHONEG  
2010

# Digoradur

*Ur steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg, Brezhoneg 2015, a oa bet savet gant an Ofis e 2003. Diazezet e oa war stad wirion ar yezh a-benn ober kinnigoù uhelek met fetis evit suraat he dazont. Kement ha kinnig ur steuñv pleustrek da vat e oa bet divizet e zisplegañ dre vro<sup>1</sup>, anezhi ur vent dereat evit tostaat ouzh gwirvoud an dachenn.*

*Daou deul a oa bet savet evit pep hini eus an 29 bro zo e Breizh : un diagnostik ha palioù diorren. Kavout a ra deomp eo deuet ar mare da nevezñ ar studiadenn bet savet neuze ha d'ober bilañs an emdroadurioù deuet abaoe. Ra sikouro an diagnostik nevez-mañ, savet diwar an holl roadennoù hon eus dastumet hag e darempred gant oberourien pep tachenn, da sevel ur politikerezh yezh efedus.*



*Lena Louarn,  
Prezidantez Ofis ar Brezhoneg*

---

<sup>1</sup> Diwar ur genstaged douaroniel, armerzhel, sokial ha/pe sevenadurel eo treset ar broioù bet termenet gant al lezenn “Voynet“ e 1999. Ar broioù-se an hini eo a implijer er steuñv-mañ.


# Taolenn

<b>SAVIAD BRO SANT-BRIEG.....</b>	<b>4</b>
<b>Sifroù pennañ bro Sant-Brieg.....</b>	<b>5</b>
<b>Dibarderioù bro Sant-Brieg.....</b>	<b>5</b>
<b>Bro Sant-Brieg eo ar vro ma komzer ar muiañ ar yezh e Breizh-Uhel.....</b>	<b>6</b>
<b>AR BREZHONEG EN DESKADUREZH .....</b>	<b>7</b>
<b>Kelenn er skol.....</b>	<b>9</b>
Kelenn divyezhek .....	9
Niver a zeskidi er c’helenn divyezhek.....	9
Stadegoù ar c’helenn divyezhek.....	13
Kelenn brezhoneg.....	15
An tañva d’ar brezhoneg er c’hentañ derez.....	15
Ar c’helenn brezhoneg en eil derez.....	15
<b>An deskadurezh uhel .....</b>	<b>17</b>
<b>Ar c’helenn d’an oadourien.....</b>	<b>18</b>
<b>AR BREZHONEG ER VUHEZ FORAN .....</b>	<b>21</b>
<b>Politikerezh yezh an departamant .....</b>	<b>22</b>
Penaos e vez kemeret ar brezhoneg e kont gant an departamant .....	22
Ar budjed gouestlet d’ar brezhoneg gant an departamant .....	22
<b>Kevrat bro Sant-Brieg.....</b>	<b>23</b>
<b>Oberoù ar strollegezhioù lec’hel .....</b>	<b>23</b>
<b>IMPLIJ A YEZH GANT AR GEVREDIGEZH .....</b>	<b>26</b>
<b>Servijoù d’an dud.....</b>	<b>26</b>
Bed ar vugaligoù.....	26
Dudi evit ar vugale .....	26
Dudi evit an oadourien .....	27
<b>Buhez speredel .....</b>	<b>27</b>
<b>Embann .....</b>	<b>27</b>
Ar c’hazetennoù.....	28
Er skinwel hag er skingomz.....	28
<b>Marc’had al labour.....</b>	<b>28</b>
<b>An armerzh.....</b>	<b>29</b>
<b>KLOZADUR .....</b>	<b>32</b>
<b>AR GALLAOUEG E BRO SANT-BRIEG .....</b>	<b>35</b>
Ar c’helenn er skol.....	35
Kelenn d’an oadourien.....	36
Buhez foran .....	36
Buhez sevenadurel .....	36
<b>STAGADENNOU .....</b>	<b>38</b>
<b>LEVRENNADUR.....</b>	<b>40</b>
<b>MAMMENNOU .....</b>	<b>40</b>

# Saviad bro Sant-Brieg




## Kinnig an etrekumunelezh - 2009



# Sifrou pennañ bro Sant-Brieg

Niver a gumunioù	64
Poblañs hollek e 2006	191 926
Emdroadur ar boblañs etre 1999 ha 2006	5,3%
Gorread	1 165
Stankted ar boblañs	162

*Emdroadur bloaziek poblañs ar c'humunioù etre 1999 ha 2006*



## Dibarderioù bro Sant-Brieg

Ur vro etre eo bro Sant-Brieg. Aes eo dont betek eno gant an hent, an tren pe ar c'harr-nij. Pol pennañ ar vro eo kêr Sant-Brieg. Kreskiñ a ra ingal poblañs ar vro abaoe 40 vloaz (emdroadur kontrol da hini an departamant dre-vras). Diazezet eo ar c'hresk war un emdroadur naturel (muioc'h a c'hanedigezhioù eget a varvioù) ha war ar ventel enbroañ-divroañ zo pozitivel en-dro. Er vro e adkaver tamm pe damm ar memes emdroadur hag e bro Roazhon pe bro Sant-Maloù : +0,8% bep bloaz etre 1999 ha 2006.

Kresket eo an niver a bostoù-labour muioc'h eget e Breizh dre-vras e-kerzh an dek vloaz diwezhañ. E kêr Sant-Brieg ez eus 40% eus postoù-labour ar vro. Lambal eo eil pol pennañ ar vro e-keñver al labour. E tolpad-kêrioù Sant-Brieg emañ poloù labour pennañ all ar vro. Er servijoù emañ an div drederenn eus ar postoù-labour e takad labour Sant-Brieg. Al lodenn vrasañ eus gennad ar greanterezh a ya gant ar gounezvouederezh.

Mammenn : EBSSA



## Bro Sant-Brieg eo ar vro ma komzer ar muiañ ar yezh e Breizh-Uhel

Da-geñver niveradeg 1999 e oa bet savet gant an EBSSA un enklask anvet *Étude de l'histoire familiale*. Kenlabouret en doa an Ofis ganto a-benn dielfennañ an disoc'hoù. En enklask-se e oa goulennoù a denne d'an implij eus ar yezhoù er gêr ha drezo e oa bet dastumet roadennoù a c'haller fiziout warno evit ar pezh a sell ouzh an niver a vrezhonegerien deuet d'o oad gour e pep departamant.

Diwar ar sifroù-se, diwar sifroù ar c'helenn divyezhek ha diouzh dibarderioù pep bro ez eus tu da sevel brasjedadennoù war an niver a yezherien e pep kornad. E-se e c'hellomp lakaat e oa tost da 6 000 brezhoneger o chom e bro Sant-Brieg e 1999, da lavaret eo war-dro 3,2% eus ar boblañs (pa save an dregantad anezho da 6,7% e Breizh).

Da-heul e c'hellomp brasjediñ ivez **e oa etre 5 000 ha 6 000 yezher e bro Sant-Brieg e 2009**, da lavaret eo war-dro **3%** eus poblañs ar vro (pa savfe an dregantad anezho da 5 % e Breizh dre-vras). **Stabil a-walc'h e vefe chomet poblañs ar yezherien er vro**. Lakaet e vez war-wel gant sontadeg TMO-Région Fañch Broudig kaset da benn e Kerzu 2007<sup>2</sup> eo **kalz brasoc'h poblañs ar yezherien/komprenerien e reter Aodoù-an-Arvor** eget e reter ar Mor-Bihan. Bras eo levezon kêr Sant-Brieg en departamant; desachañ a ra tud ha brezhonegerien en o zouez tud eus bro Gwengamp pe bro Treger ha Goueloù da skouer, broioù m'emañ an implij eus ar yezh en e uhelañ.


Kement ha yezherien zo e bro S.Brieg hag e bro Roazhon (niver kriz a yezherien). E-keñver **feur ar yezherien er boblañs avat emañ bro Sant-Brieg da vat e renk kentañ Breizh-Uhel** gant e-tro 3%, pell dirak bro Roazhon gant e-tro 1,5%. Diwar-se eo e c'haller lavaret eo ar vro e Breizh-Uhel ma vez komzet brezhoneg ar muiañ.

---

<sup>2</sup> Sontadeg kaset da benn gant TMO Régions e Kerzu 2007 war an implij eus ar yezh ha penaos e vez degemeret ar yezh er pemp departamant.

# Ar brezhoneg en deskadurezh

Ar brezhoneg er c'helenn – Bloavezh-skol 2009/2010





E 4 c'humun hepken e c'heller deskiñ brezhoneg. N'eo ket emdroet nemeur skeudenn ar vro e-keñver 2003. Chom a ra kreizennet ar c'helenn e tolpad-kêrioù Sant-Brieg hag e kêr Sant-Brieg dreist-holl c'hoazh.

Div araokadenn zo bet war kartenn al lec'hioù kelenn memes tra :

- Astennet ha klokaet eo bet ar c'helenn divyezhek p'eo bet digoret al **lec'h kentañ gant an hentad katolik** e Tregaez e 2004.
- E Sant-Brieg e c'haller **kenderc'hel gant ar c'helenn divyezhek en eil derez publik** (skolaj) abaoe distro-skol 2008.

War an tu fall avat eo emdroet kelenn ar yezh evel danvez dibab. **Er-maez eus an hentennoù divyezhek ne c'haller deskiñ brezhoneg e hini ebet eus skolajoù ar vro ken.** Ne vez ket kinniget ar brezhoneg da zanvez dibab **er skolajoù ken**, abaoe 2008.

## An niver a zeskerien e 2008/2009



382 zesker a oa e distro-skol 2008 (**stabil** e-keñver 2004). Met **nebeutoc'h a zeskerien zo e kêr Sant-Brieg** e 2008 eget e 2004 abalamour d'an digresk er c'helenn brezhoneg (danvez dibab) hag er skol-veur.

Emañ an hanter eus deskidi ar vro er c'helenn divyezhek, an hent gwellañ evit stummañ brezhonegerien (izeloc'h eo ar feur-se e Breizh : 40%). Muioc'h a zeskerien zo er c'hentañ derez e Sant-Brieg eget e Gwengamp.

**N'eo ket aet an niver a zeskerien war-raok e-skoaz 2004** pa'z eo kresket e Breizh dre vras (+10%) : kempouezet eo an digresk er c'helenn brezhoneg evel danvez dibab gant ar c'hresk er c'helenn d'an oadourien hag er c'helenn divyezhek. A-drugarez d'ar c'hresk er c'helenn divyezhek hag er c'hentelioù noz eo stummet muioc'h a yezherien hiziv an deiz eget e 2004.




# Kelenn er skol

## Kelenn divyezhek

### ➤ Niver a zeskidi er c'helell divyezhek


An niver a skolidi divyezhek hag an niver a skolidi en deskadurezh dre-vras e bro Sant-Brieg



Dre vras e kresk an niver a skolidi divyezhek er vro : ouzhpenn daougementet eo bet an niver a skolidi etre 1999 ha 2009 (+123,6%) tra ma'z ae kentoc'h war zigresk sifroù hollad ar skolioù er vro-se (-2,6% etre 1999 ha 2008). Klotañ a ra an tuadurioù-se gant re Breizh (+129,7% evit ar c'helell divyezhek ha +2,3% evit ar c'helell dre-vras). Diskouez a ra al lusk-se eo dedennet kerent ar skolidi gant ar c'hinnig divyezhek ha, da-heul, ez eus ezhomm aesaat ha kenurzhiañ an diorren anezhañ. Ezhomm zo avat da reiñ lusk en-dro d'ar c'hresk.

Abaoe distro-skol 2003 eo kresket an niver a skolidi divyezhek eus tost 40 %. Par eo kresk ar vro da geidenn Breizh hag un tamm **uheloc'h eo eget kresk Aodoù-an-Arvor** zoken.

Lañs zo gant ar c'helell publik. Met dre m'eo chomet kreizennet ar c'hinnig er gêrbenn hepken n'eo ket kresket ar c'helell er vro evel ma c'hallje bezañ bet. Gant 200 skoliad ez eo bro Sant-Brieg ar **14<sup>vet</sup> bro e Breizh** evit an niver a skolidi divyezhek, evel e 2004 (ar 7<sup>vet</sup> bro pobletañ eus Breizh eo koulskoude).




Bet eo Diwan an hentenn bennañ ha nemeti er vro e-pad pell. E-touez skolioù kentañ Breizh eo bet krouet hini Sant-Brieg, e 1979. E 2004 e oa pevare skol vrasañ Breizh. Deuet e oa da vezañ ar 7<sup>vet</sup> skol e 2009. Kresk zo bet betek 2000/2001 a-raok dinerzhiñ un tammig. Skoliata a rae an tri c'hard eus ar skolidi divyezhek e 2003, nebeutoc'h eget an hanter e 2009. Hiziv eo bet adtapet Diwan gant an hentenn publik. Ma c'haller soñjal e c'hall skol Diwan Sant-Brieg kreskiñ un tammig c'hoazh e weleer splann gant krommenn emdroadur an 10 vloaz tremenet eo poent sevel skolioù Diwan all e kêr ha tro-war-dro Sant-Brieg evit adlañsañ ar c'hresk da vat.

### **Berzh a ra ar c'helenn divyezhek publik e Sant-Brieg ; kreñvaet eo bet gant digoridigezh ar c'helenn divyezhek er skolaj e 2008.**

Diaesterioù zo gant an hentad katolik a oa bet savet e 2004. En arvar emañ an hentad-se zoken. Kresk mat zo bet betek 2005 hag un digresk dizehan zo abaoe. Heñvel eo an emdroadur-se ouzh hini ar c'helenn prevez en departamant avat.


Dre-vras eo deuet ar c'hresk, evit un darn vat, eus **digoradur an hentad publik** e 2000 (+ 66% e-keñver 2004). Un dra vat eo e vefe bet digoret en eil derez e 2008. Evit kreñvaat ar skolaj publik divyezhek ha tremen eus un nebeud eurvezhioù d'ur gwir hentenn divyezhek ez eus ezhomm sevel lec'hiadoù nevez bremañ er c'hentañ derez.

*An niver a skolidi hervez al live*



Kresket eo an niver a skolidi er skolioù kentañ. N'eus ket kalz muioc'h a skolidi er skolioù-mamm e 2008 eget e 2003 avat, abalamour ma n'eo ket aet war-raok Diwan nag an hentenn brevez. Daoust da bep tra ez eus ur c'hresk hollek e-keñver an diagnostik diwezhañ : tremenet eur eus 143 skoliad e distro-skol 2003 da dost 200 e 2009. **Tonket eo ar sifroù da stabilaat dizale koulskoude ma ne vez ket krouet lec'hioù nevez all.**


*Kresk keñveriet Bro Sant-Brieg ha Breizh*



Betek 2006 eo kresket an niver a vugale e skolioù divyezhek ar vro evel e Breizh. Abaoe 2007 avat ez eus un digresk er vro : an diouer a zigoradurioù zo kaoz.




*An niver a skolidi e bro Sant-Brieg keñveriet gant broioù all*



Etre 2003 ha 2009 eo brasaet kalz an diforc'h etre bro Sant-Brieg ha bro-Roazhon abalamour ma n'eus ket bet krouet trawalc'h a lec'hioù nevez : 4 lec'h zo bet krouet e bro Roazhon hag e bro Gwengamp da skouer, pa n'eus bet savet nemet 1 e bro Sant-Brieg. Betek 2005 e oa gant ar vro ur grommenn heñvel ouzh Roazhon ha Gwengamp met da c'houde n'eus ket bet kement a startijenn gant ar c'hresk ken : stabilaet eo bet an traoù e bro Sant-Brieg rak n'eus ket bet kinniget lec'hioù nevez d'ar familhoù.

*An niver a skolidi divyezhek gwir hag an niver lakaet da bal evit 2015*




Betek 2005 e oa geñvel krommenn bro Sant-Brieg ouzh krommenn ar palioù diorren a oa bet lakaet d'ar vro ; un tamm lañs a oa ganti zoken betek 2005. Abaoe distro-skol 2006 **eo disheñvel emdroadur ar vro diouzh ar pal lakaet en diagnostik diwezhañ : ne dizher nemet 70 % eus ar pal** bet lakaet evit 2008 pa oa tizhet 94% e Breizh (93% e bro



Treger ha Goueloù, 95 % e bro Brest). N'eus bet krouet lec'h nevez ebet er vro abaoe 2004 evit magañ ar c'hresk. E bro Sant-Brieg ez eer war-raok abalamour d'ur **c'hresk diabarzh** hepken neuze, pa'z a ar broioù all war-raok abalamour da gresk ar skolioù « kozh » kreñvaet gant nerzh ar skolioù nevez krouet.

### ➤ Stadegoù ar c'helenn divyezhek


Pouez ar c'helenn divyezhek er vro (kentañ derez – Bloavezh skol 2008/2009)



**Bihan** e chom pouez ar c'helenn divyezhek er vro, bihanoc'h an dregantadoù eget keidenn Breizh ha bro Roazhon da skouer. Disoc'h un diouer a ginnig eo atav. N'eo ket emdroet kalz pouez poblañs ar skolidi divyezhek er boblañs skol e-kerzh ar 5 bloaz diwezhañ.


Koulskoude emañ **Sant-Brieg en trede plas** (goude Gwened ha Kemper) e **renkadur dek kêr pobletañ Breizh** evit an dregantad a skolidi divyezhek er c'hentañ derez (gant tost da 4% evit ar bloavezh 2008/2009), **gant div skol divyezhek hepken. Diskouez a ra ar berzh a ra an div skol-se, pa'z eus peder pe bemp skol divyezhek e kêrioù all begenn ar renkadur-se (ha teir skol divyezhek en 8 kentañ – er-maez eus S. Brieg).** Rak-se, ma'z eo bihan dregantadoù ar vro ez eo dreist-holl abalamour ma'z eo kreizennet ar c'hinnig e Sant-Brieg, hag e karterioù zo : berzh a ra el lec'hioù ma vez kinniget met siwazh ne vez ket kinniget e trawalc'h a lec'hioù.

*Dregantad a skolidi divyezhek er c'hentañ derez.*



*Dale zo gant ar vro e-keñver departamant 22 dre vras. Kresket eo bet c'hoazh an diforc'h etre an departamant hag ar vro abaoe 2005. E 1999 e oa ur poent diforc'h etre ar vro hag an departamant, pa save an diforc'h da 2 boent e 2008. N'eo ket gwall yac'h pa soñjer eo bro Sant-Brieg lec'h buhezekañ an departamant a-fet poblañs hag ekonomiezh.*

*Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e karterioù Sant-Brieg – Bloavezh-skol 2008/2009*



Krog eo ar c'helenn brezhonek da wrizienniñ da vat e kêr Sant-Brieg. **Uhel-mat** eo an dregantadoù dija e-lec'h ma vez kinniget ; **uheloc'h eget e karterioù Brest pe an Oriant** zoken. **E karterioù kornôg kêr, ez eus skoliataet e brezhoneg ouzhpenn 8% eus ar vugale dindan 11 vloaz bremañ.** Peadra zo da zigeriñ lec'hioù divyezhek nevez e reter hag e gevred ar gumun, karterioù dibourvezet evit ar mare.

Skouer Sant-Brieg a c'hallfe bezañ kemeret ivez evit krouiñ kentelioù e kêrioù all eus ar vro evel Lambal, Plerin, Ploufragan pe Porzhig da skouer.

# Kelenn brezhoneg


## ➤ An tañva d'ar brezhoneg er c'hentañ derez

En Aodoù-an-Arvor n'eus nemet e bro Kallag e vez aozet un tañva d'ar brezhoneg gant an Ensellerezh-Akademiezh gant ur skolaer-bale. Evit kempouezañ an diouer a dañva n'en deus ket aozet departamant Aodoù-an-Arvor un tañva er skolioù evel e Penn-ar-Bed. Etre 8,1 ha 9,2% eus poblañs skolioù kentañ derez bro Brest a vez kizidikaet ouzh ar brezhoneg dre stignad departamant Penn-ar-Bed da skouer.

Evit ar skolidi n'int ket skoliataet en hentadoù divyezhek eo an tañva un doare da gaout un tamm darempred gant ar yezh koulskoude. Ne stumm ket brezhonegerien da vat met kizidikaat a ra ouzh ar yezh, reiñ a ra d'ar vugale alc'hwezioù da gompren o endro. Gallout a ra an tañva-se er c'hentañ derez skoazellañ ar c'hentelioù en eil derez, evel e Kallag, pa ro c'hoant d'ar vugale da genderc'hel gant ar yezh war-lerc'h. Ouzhpenn-se e weler gant diagnostik bro Brest hag a denn splot eus politikerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed n'eus ket kevezerezh etre ar c'hinnigoù (kelenn divyezhek – tañva ar yezh). El lec'hioù m'eo ar c'hreñvañ ar c'helenn divyezhek emañ an tañva en e greñvañ ivez. Diskouez a ra an tuadur "seul vui seul c'hoazh" : seul vrasoc'h ar c'hinnig brezhoneg en ul lec'h bennak, seul vui eo dedennet an dud gant ar yezh.

## ➤ Ar c'helenn brezhoneg en eil derez

*Diwar an 29 bro zo e Breizh, emañ bro Sant-Brieg e-touez an 13 bro na ginnigont netra er skolaj*




*Aet eo ar vro war-gil evit an danvez dibab. Direizh eo an dra-se p'emaomp amañ gant bro kêrbenn an departamant.*

Pa oa 5 skolaj pe lise gant kentelioù brezhoneg e 2004 ne chom nemet 2 e 2009. Serret eo bet ar c'hentelioù e 3 skol eus Sant-Brieg : e skolaj publik Jean Macé, e lise publik Freyssinet hag e lise prevez Sant-Pêr.

N'eus nemet e liseoù e vez kentelioù e 2009 : **n'eus skolaj ebet ken hag a ginnig kentelioù brezhoneg er vro, ur pezh kiladenn eo e-keñver an diagnostik diwezhañ.**




*An niver a skolidi en eil derez e 2008 e-keñver 2004*



Nec'hus-kenañ eo sifroù ar c'helenn brezhoneg en eil derez er vro. Dre-vras ez eus bet digresk etre 2004 ha 2008 en niver a skolidi a zesk brezhoneg en eil derez. Met pa seller a-dost emañ an darn vrasañ anezho e lise prevez Kintin hag a zo kresket mat abaoe 2004. Ma kendalc'h an traoù er mod-se e vo serret ar c'hentelioù e lise publik Sant-Brieg (serradur rakwelet gant ar rektorelezh evit distro-skol 2011) ha ne chomo netra ken er vro, war-bouez lise katolik Kintin.

*Ar c'helenn brezhoneg er vro e-skoaz Breizh a-bezh*



War zigreskiñ ez a an niver a skolidi er vro, pa chom stabil e Breizh a-bezh. Digresk bras 2006 a glot gant an digresk e lise publik Sant-Brieg, pa oa bet serret ar c'hentelioù el lise Freyssinet). E 2007 e kresk en dro gant skolidi lise prevez Kintin.





Amañ, muioc'h c'hoazh eget er peurrest eus Breizh, e weler ne vez ket graet war-dro ar c'helenn brezhoneg gant kalz a boell : ne glot ket sifroù ar c'helenn divyezhek (kresk e pep hentad) gant re ar c'helenn brezhoneg evel danvez dibab.

Un digresk zo bet er vro abalamour d'ar skolioù publik ha d'al lise dreist-holl, un digresk brasoc'h eget e departamant Aodoù-an-Arvor ha kalz brasoc'h eget e Breizh a-bezh. Padal eo bet tric'hementet an niver a liseidi e lise nemetañ an deskadurezh katolik a ginnig kentelioù brezhoneg er vro (hini Kintin).


Gant ar c'hentelioù en eil derez e vez klokaet ar c'helenn divyezhek koulskoude. Talvoudus eo ar c'hentelioù-se evit stummañ danvez brezhonegerien. Gallout a rafe al liseidi a gelenner brezhoneg dezho dont da vezañ kelennerien divyezhek diwezhatoc'h. Pouezus eo mare al lise, ur mare ma vez graet dibaboù war dachenn ar micherioù. An darn vrasañ eus ar gelennerien zo kroget da zeskiñ en doare-se, da lavaret eo er-maez eus ar c'helenn divyezhek. A-bouez-bras eo mirout ha diorren an hent-se. War un termen berroc'h eget an hini gortozet gant ar c'helenn divyezhek, e c'hall bezañ un diskoulm d'an diouer a gelennerien stummet war ar brezhoneg.

## An deskadurezh uhel

Stummet e vez an danvez kelennerien war ar brezhoneg e skourr Sant-Brieg **ESSM Breizh abaoe 1991**. E 2002 e oa bet krouet kreizenn stummañ ar c'helenn war ar brezhoneg e Sant-Brieg ivez.

**Kinnig a ra skourr Sant-Brieg eus Skol-Veur Breizh-Uhel kentelioù brezhoneg d'ar studierien abaoe 2004.**


*An niver a studierien e Sant-Brieg hag e Breizh*



Daoust d'an ezhommoù kelennerien evit diorren ar c'helenn divyezhek eo **digresket an niver ar studierien stummet e ESSM Sant-Brieg abaoe 2004**. Emañ an tuadur-se ivez avat en niver hollek a studierien e Breizh hag en niver a studierien en ESSM Sant-Brieg.

# Ar c'helenn d'an oadourien

An niver a dud deuet enskrivet er c'hentelioù noz etre 2003 ha 2008



Kentelioù d'an dud deuet zo abaoe pell zo er vro : **abaoe 40 vloaz** ez eus kentelioù noz e bro Sant-Brieg.

**Muioc'h** a dud a zesk brezhoneg **e kêr Sant-Brieg eget e Gwengamp** (heñvel e oa e 2004) **ha kement zo hag e Lannuon pe Gwened.**

Goude un digresk etre 2003 ha 2005 e oa adkresket an niver a dud deuet a dap kentelioù e 2006 ha 2007 : +12,7% pa oa bet un digresk e Breizh a-bezh (-10%) met an daou vloavezh diwezhañ zo bet bloavezhioù digresk adarre. E div gumun hepken ez eus kentelioù : Sant-Brieg, gant Kreizenn Abherve, ha Ploufragan, gant Nevez Amzer.

**Kentelioù brezhoneg zo e Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor.** Abaoe tri bloaz e vez kinniget kentelioù brezhoneg, gant renerezh ar c'hoskor, da implijidi an departamant e Sant-Brieg. Heuliet e oa ar c'hentelioù-se gant 8 den er bloavezh 2009/2010, live an deraouidi ganto. N'eo ket aozet ar c'hentelioù-se war an amzer labour evel ma ra Kuzul-rannvro Breizh evit e implijidi.

Ofis ar retredidi e Sant-Brieg a ginnig kentelioù ivez, abaoe 2006 (un 10 den bennak).



 Kelenn brezhoneg evit an oadourien

*Peadra zo da ziorren ha da grouiñ kentelioù e kumunioù all evel e Kintin, Lambal, Plerin, Porzhig, Erge-ar-Mor... Ur benveg mat e vefe Ti Bro Sant-Brieg hag a zo war ar stern, evit skoazellañ ha diorren ar c’helenn d’an oadourien er vro ma tiviz krouiñ postoù-labour kelenn d’an dud deuet evel ez eus bet graet gant Al Levrig e Bro Treger ha Goueloù*

## Klozadur ar pennad war ar brezhoneg en deskadurezh

Gwriziennet eo ar c’helenn er vro **abaoe pell** : 40 vloaz zo bremañ e vez kinniget kentelioù noz er vro ha 30 vloaz zo e kaver ar c’helenn divyezhek (abaoe ar penn-kentañ). An holl zoareoù kelenn a gaver er vro, nemet an tañva. Chom a ra dreistkreizennet ar c’helenn e kêr Sant-Brieg c’hoazh.

**N’eo ket emdroet kalz skeudenn ar yezh er vro e-kerzh ar 5 bloaz diwezhañ.** Krouet eo bet an hentad divyezhek katolik kentañ er vro hag astennet eo bet ar c’helenn divyezhek d’an eil derez publik. Stabil eo chomet niver an deskidi er vro avat : kresk ar c’helenn divyezhek hag ar c’hentelioù d’an oadourien zo kempouezet gant digresk ar c’hentelioù brezhoneg en eil derez.

**Kreskiñ a ra an niver a skolidi divyezhek er vro** (kresk a 39% etre 2003 ha 2009), daoust ma n’eus bet krouet lec’h nevez ebet abaoe 2004. Met ar c’hresk-se ne heuilh ket ken hini Breizh : an diouer a zigoradurioù zo kaoz. Evit reiñ startijenn en-dro d’ar c’helenn divyezhek er vro ha kreñvaat an hentad publik er skolaj eo ret krouiñ lec’hiadoù nevez, en tri doare kelenn.

**Nec’husoc’h** c’hoazh eo emdroadur ar c’helenn brezhoneg en eil derez er vro eget e Breizh dre vras. Talvoudus eo ar c’helenn-se koulskoude evit ar re yaouank niverus n’o deus ket gallet bezañ skoliataet er c’helenn divyezhek. War verr termen e c’hall “reiñ” d’an hentadoù divyezhek danvez kelennerien ouzhpenn. Direizh-krenn eo ne vefe ket tu da zeskiñ ar yezh ken e skolaj ebet eus kêr-benn an departamant.

**Perzhioù kreñv** zo gant ar vro war dachenn ar brezhoneg : **Kêr Sant-Brieg zo en trede plas** (goude Gwened ha Kemper hag a-raok Roazhon ha Brest) e renkadur dek kêr pobletañ Breizh e-keñver an dregantad a skolidi divyezhek er c’hentañ derez. Gwriziennet-mat eo ar c’helenn divyezhek enni : e karterioù zo eo uheloc’h pouez ar c’helenn divyezhek e Sant-Brieg eget e Brest pe en Oriant .

Gallout a ra **studierien** skol-veur Sant-Brieg heuliañ kentelioù brezhoneg abaoe 2004.

E Sant-Brieg ez eus **kement a dud deuet o teskiñ hag e Lannuon pe Gwened.**

Ul lusker a vank er vro memes tra. Gallout a reer liammañ diskar krommenn ar c'heleñn d'an oadourien, e 2004, ouzh ar mare m'eo bet kollet e implij yaouank gant Telenn. Kas a rae da benn ul labour bodañ, skignañ keleier e-touez oberourien ar vro. Ur skeudenn eus birvilh ar c'hevredigezhioù a oa anezhañ. Raktres Ti Bro Sant-Brieg a c'hallo bezañ ul lec'h talvoudus evit krouiñ an nerzh da ziorren ar c'hinnig, koulz er c'heleñn divyezhek hag er c'heleñn d'an dud deuet. Ezhomm a vo da labourat e Sant-Brieg, met ivez er maez eus Sant-Brieg.

# Ar brezhoneg er vuhez foran

## Oberourien ar politikerezh yezh er vro

Emañ ar barregezhioù da gas ur politikerezh yezh da benn en tiriad e dalc'h meur a strollegezh tiriadel. Bras eo barregezhioù ar strollegezhioù tiriadel lec'hel (Rannvro, Departamant, DPKE<sup>3</sup>, kumunioù) abalamour

- Da gentañ-penn, **ar Stad** a ver an hentoù-Stad da skouer hag an holl servijoù melestradurel (endro, sevenadur, aferioù yec'hedel ha sokial, h.a.).
- **Rannvro Breizh** zo karget da sevel ha kempenn al liseoù, d'ober war-dro ar stummañ, an treuzdougen. Roet he doa lañs, e 2004, d'ur politikerezh tiriadel diazezet war ar broioù. Sinet ez eus bet kevratoù bro a-benn steuñvekaat politikerezhioù ar rannvro dre diriad. Embannet he deus ur sturlevr pleustrek da ziorren ar brezhoneg hag ar gallaoueg e raktresoù ar c'hevratoù Rannvro/Bro e Mezheven 2009.
- **Departamant Aodoù-an-Arvor** a ver ar skoloù, an hentoù-departamant, frammoù foran sevenadurel pe takadoù naturel ivez. Ledan eo atebegzhioù ar strollegezh tiriadel-se en obererezh sokial evit an dud oadet, da skouer, pe evit ar vugale.
- **An etrekumunelezh** : war ledanaat ez a tachenn galloudoù an etrekumunelezh. Bras eo pouez ha galloud Sant-Brieg Tolpad-kêrioù e pep keñver (ar boblañs dre-vras (58% eus poblañs ar vro, an armerzh, an aveadurioù sevenadurel, ar skolioù (60% eus poblañs skol ar vro,...)). Merañ a ra ar c'houronklec'h c'hoari Aquabaie, aveadurioù sport evel ar poull-ruzikat pe Ti ar Bae.
- **Ar c'humunioù** : ledan eo kefridioù ha galloudoù ar c'humunioù evit merañ o ziriad.

- Gallout a ra pep strollegezh foran ober gant ar brezhoneg er vuhez foran. Gant al lezenn e vezer rediet da implijout ar galleg met implijout ur yezh all n'emañ ket e-maez lezenn : aotreet eo implij ar brezhoneg e-kichen ar galleg er vuhez foran. Kreñvaet eo bet an dielfennadur-se eus an testennoù gant ar Vonreizh kemmet e miz Gouere 2008. Degemeret ez eus bet ur mellad gant ar Parlamant hag a anavez ar yezhoù rannvro : “Mellad 75-1. - *Ul lodenn eus glad Frañs eo ar yezhoù rannvroel* ». Gallout a ra pep strollegezh, war he zachenn, ober muioc'h gant he barregezhioù, a-drugarez da bennaenn frankiz emverañ ar strollegezhioù tiriadel

<sup>3</sup> diazevadur publik a genlabour etrekumunel

# Politikerezh yezh an departamant

## Penaos e vez kemeret ar brezhoneg e kont gant an departamant

### Stad an divyezhegezh er panellerezh hent

Aodoù-an-Arvor e oa bet an departamant kentañ o tivizout staliañ panneloù divyezhek war ul lodenn eus an hentoù meret gantañ e 1984.

**War hentoù kornôg an departamant hepken eo bet divizet ober gant an divyezhegezh.** N'eus tamm divyezhegezh ebet war hentoù kreiz ha reter an departamant. N'eus netra c'hoazh e bro Sant-Brieg neuze. Anvioù brezhonek kumunioù reter an departamant (evel Sant Ke-Porzh-Olued, Kintin, S.-Brieg, Loudieg...) zo implijet er rouedad hentoù aveet gant panneloù divyezhek e kornôg an departamant koulskoude, ha kemend-all zo gwir ivez war hentoù departamant ar Mor-Bihan a gas war-du kumunioù Aodoù-an-Arvor. Poellek e vefe adkavout anvioù brezhonek ar c'humunioù e panellerezh an departamant a-bezh ivez.

**Abaoc** 1984 eo bevennet implij ar yezh gant an departamant d'un dachenn strizh hepken. Gant Kuzul-departamant ar Mor-Bihan, koulskoude, e vez lakaet panneloù divyezhek e pep lec'h en departamant abaoe 2004. Diskouez a ra ar sontadegoù emañ a-du an darn vrasañ eus ar Vretoned gant ar panellerezh divyezhek e Breizh-Uhel kenkoulz hag e Breizh-Izel : hervez ar sontadeg kaset da benn gant TMO Région diwar atiz Fañch Broudig, ez eus 74% eus an dud zo a-du gant ar panellerezh divyezhek e Breizh-Uhel. Kadarnaet eo gant ar sontadeg-se ez eo ar brezhoneg yezh Breizh. Ouzhpenn-se e laka war wel enklask Fañch Broudig eo kalz brasoc'h poblañs ar gomprenierien/yezherien e reter Aodoù-an-Arvor eget e reter ar Mor-Bihan.

En tu all da hentoù kornôg an departamant e chom dister plas ar yezh alies. Skoazellañ ha heuliañ obererezh ar bed kevredigezhel eo a vez graet gant an departamant dreist-holl. Ne gemer ket intrudu war politikerezhioù nevez, evel an tañva er skolioù, diorren ar yezh e lec'hioù degemer ar vugaligoù pe kizidikaat o familhoù, da skouer, evel ma ra Kuzul-departamant Penn-ar-Bed.

Pennadoù skrid liesseurt e brezhoneg a vez bep miz er c'hannadig Côtes d'Armor, abaoe Gwengolo 2006. Panevet ar gazetenn-se ne vije tamm brezhoneg ebet war skoroù-kehentiñ an departamant. Unyezhek eo al lec'hienn Genrouedad da skouer. Unyezhek eo ivez al lec'hienn Wikiarmor, nevez-digoret gant ar c'huzul-departamant..

Diwar atiz rener al levraoueg ez eus brezhoneg ouzh panellerezh levraoueg an departamant e Plerin, war ar c'hirri, war ar paper lizher hag ar goloioù. Met n'eus ket a vrezhoneg e burevioù nevez ar C'huzul-departamant e Sant-Brieg, digoret e 2008, pe e Zoo nevez Tregonneur pe c'hoazh e savadurioù bras an departamant (Kastell ar Roc'h Ugu, da skouer).

## Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamant

Ur font “skoazell d'ar sevenadur brezhonek ha gallaouek”, staget ouzh budjed ar sevenadur, a vod oberoù Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor a denn d'ar yezh. Estreget ar brezhoneg a vez skoazellet gant ar font-se : sonerezh Breizh, dañsoù Breizh, festivalioù, h.a. An div drederenn eus ar font-se a ya da skoazellañ oberoù a denn d'ar yezh war-eeun memes tra. D'un 300 000 € bennak a euroioù e sav, well-wazh, ar budjed bloaziek gouestlet d'ar



brezhoneg gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor. **Peder gwezh izeloc'h eget e Penn-ar-Bed eo ar budjed dre annezad gouestlet d'ar brezhoneg en Aodoù-an-Arvor : 0,61 € dre annezad.**

War dachenn ar c'heleñn, estreget lodenn Diwan, e vez skoazellet dreist-holl an embann dafar gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor dre an aozadur TES staliet e Sant-Brieg. Stabil-kenañ eo ar sammad roet da dTES avat. Ur perzh bihan a gemer an departamant e stummadur ar gelennerien en ur arc'hantaouiñ yalc'hadoù an danvez kelennerien.

N'eus programm ebet gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor evel ar pezh a vez kaset da benn gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed evit diorren an embann ha ledanaat ar c'hinnig levrioù evit ar re yaouank (Priz ar Yaouankiz). N'eus ket kennebeut a bolitikerezh evit broudañ ar strollegezhioù lec'hel all da gemer ar yezh e kont er vuhez foran dre ur programm skoazell d'ar c'humunioù ha d'ar frammoù etrekumunel evit kas da benn studiadennoù war an anvioù-lec'h hag evit staliañ ur panellerezh divyezhek.

## Kevrat bro Sant-Brieg

Kevratoù bro liesvloaziek (evit ar prantad 2006-2012) zo bet sinet gant ar broioù ha Rannvro Breizh e 2006. Ganto e vez steuñvekaet politikerezhioù ar Rannvro e pep tiriad. Tri goload a ya d'ober ar C'hevratoù bro. An eil goload («frammadurezh rannvroel/lec'hel») a denn da raktresoù kendivizet etre ar Rannvro hag ar broioù ; danvez ar C'hevratoù eo.

N'eo ket bet lakaet en a-raok gant ar Rannvro ar Chanter 9, da lavaret eo an hini a glot gant ar politikerezh yezh. C'hoant he deus bet e vefe roet lañs d'ar raktresoù gant ar broioù. N'eo ket bet adkemeret ar Chanter 9 e Kevrat bro Sant-Brieg ha ne gaver enni meneg ebet eus ar yezh a-hend-all.

Skoazellet e c'hall bezañ raktresoù a denn d'ar brezhoneg gant trede goload ar gevratese («frammadurezh lec'hel») a denn da raktresoù n'int ket termenet en a-raok er c'hevratoù. Bez' eo an hent kinniget gant ar C'huzul-rannvro evit ma harpfe raktresoù lec'hel a denn d'ar brezhoneg (staliañ panneloù-heñchañ divyezhek, sevel klasoù pe skolioù divyezhek, h.a.). Prezidanted broioù Breizh a oa bet kelaouet eus an dra-se dre ul lizher gant Prezidant Rannvro Breizh e deroù 2008. Embannet he deus Rannvro Breizh he youl da lakaat ar broioù d'ober evit ar brezhoneg oc'h embann ur sturlevr **pleustrek** da ziorren ar brezhoneg hag ar gallaoueg e raktresoù ar c'hevratoù Rannvro/Bro. Broudet e vez ar broioù gant ar Rannvro da ziorren ar yezh en o raktresoù. Gant skoazell ar rannvro e c'hall ar broioù dougen raktresoù tro-dro d'ar yezh. Skoazellet e vo, evel-se, arc'hantaouiñ raktres Ti Bro Sant-Brieg.

## Oberoù ar strollegezhioù lec'hel

### Kizidikaat ar gargidi

Evit kas da benn ur politikerezh yezh diazezet war un diviz politikel ez eus ezhomm stummañ kargidi. Abadennoù stummañ a vez aozet ingal gant an Ofis e skourr rannvroel ar CNFPT e Gwened da skouer abaoe 2003, un dra dibar e Frañs. Ur perzh oberiant a gemer Ofis ar Brezhoneg enno Fiziet ez eus en Ofis ober ur staj klok daou zevezh diwar-benn an doareoù da verañ an divyezhegezh en un tiriad. Dalc'het e vez e miz Here abaoe 2006.

En eil dalc'h e oa bet daou gargiad eus ti-kêr Sant-Brieg o kemer perzh. Bez' e oa ivez un teknikour eus servij hentoù departamant Aodoù-an-Arvor.



Heuliet e oa bet stajoù ar CNFPT, enno kentelioù kizidikaat d'ar brezhoneg (stajoù "les fondamentaux de la culture bretonne" pe "mise en oeuvre des politiques culturelles"), gant 11 kargiad eus bro Sant-Brieg etre 2005 ha 2008 (eus Tiez-kêr Tregaeg, Lambal, Plerin, Sant-Brieg, Pleneventer, Porzhig hag ar C'huzul-departamant).

**Divizet en doa ti-kêr Sant-Brieg krouiñ ur bodad trakêr** war sevenadur Breizh, e Gouere 2004, evit kas ar brezhoneg ha sevenadur Breizh war-raok e Sant-Brieg. **Staliañ ur panellerezh divyezhek e** oa bet an **dachenn gentañ** dibabet gant ar bodad evit mont war-raok. D'ar 6 a viz C'hwevrer 2007 e oa bet votet a-du gant ar c'huzul-kêr da staliañ ur panellerezh divyezhek. Met **n'eus ket bet araokadennoù abaoe 2004**. Bez' eo Sant-Brieg ivez unan eus ar c'hêrioù bras diwezhañ ma n'eo ket bet votet ar garta Ya d'ar brezhoneg.

Un nebeud sinoù a-du gant ar yezh zo bet gant ar strollegezhioù lec'hel abaoe 2004 memes tra. Da gentañ penn e oa bet sinadur kentañ ar garta Ya d'ar brezhoneg **er vro, gant ti-kêr Porzhig** e Du 2008- live 1. Kroget e oa bet da staliañ panneloù mont e-barzh ha mont e-maez e Mezheven 2009.

Krog eo an tolpad-kêrioù d'ober un tamm gant ar yezh. Savet ez eus bet ur stumm divyezhek evit al logo nevez (ha pa ne vefe ket kinniget an div yezh par-ha-par). Dougen a ra raktres Ti ar Vro Sant-Brieg abaoe 2009.



## Klozadur ar pennad war ar bed foran

An dra bouezusañ c'hoarvezet er vro e-pad ar pemp bloaz diwezhañ eo bet ar **sinadur kentañ eus Ya d'ar brezhoneg**, gant ti-kêr **Porzhig**.

N'eus ket bet araokadennoù war dachenn implij ar brezhoneg er vuhez foran nag eus tu an departamant nag eus tu ti-kêr Sant-Brieg mod all. Koulskoude ez eus deuet skouerioù a-feson gant strollegezhioù all : panellerezh diabarzh sal ar Frankiz gant Meurgêr Roazhon, panellerezh savadurioù-kêr pe kroashentoù-tro e Redon, Kastell an Duged e Naoned hag a c'haller gweladenniñ e brezhoneg.

Dale zo gant ar vro war an dachenn-se. Strollegezhioù ar vro ne reont ket kont eus ar yezh c'hoazh.

# Implij a yezh gant ar gevredigezh

## Ti Bro Sant-Brieg

Unan eus ar c'hiladennoù brasañ evit ar brezhoneg er vro e-keñver an diagnostik kentañ eo **fin post-labour Telenn e 2004**. Savet e oa bet ur post implij-yaouank. N'en doa ket gallet ar c'hevread Telenn mirout ar post-se pa vanke arc'hant. Gallout a rae ar vro tennañ splet eus an dense evit kenurzhiañ, kelaouiñ, skignañ keleier e-touez kevredigezhioù oberiant ar vro war dachenn ar brezhoneg. Ul lusker e oa evit ar vuhez sevenadurel vrezhonek.

War ar stern emañ **raktres ti Bro Sant-Brieg** gant skoazell Tolpad-kêrioù Sant-Brieg ha Rannvro Breizh dre ar gevrat-bro. Ezhomm zo eus ur framm evel-se er vro. Talvoudus e vo evit frammañ ha skoazellañ ar bed kevredigezhel hag a labour evit ar yezh er vro. Gallout a raio disoc'hañ war krouidigezh postoù-labour e brezhoneg er vro ivez.

## Servijoù d'an dud

War dachenn ar servijoù d'an dud war an oad n'hon eus renablet ober ebet evit ar mare.

### Bed ar vugaligoù

N'eo ket diorroet kalz ar yezh e bed ar vugaligoù e Breizh c'hoazh. Un dachenn nevez eo ha n'eus deuet netra er vro evit se. Disheñvel eo diouzh ar pezh a oa c'hoarvezet gant ar c'helenn divyezhek, pa oa bet savet ur skol Diwan buan-kenañ e kêr S.-Brieg. E Breizh ez eus bet un araokadenn abaoe diagnostikoù kentañ 2004 gant krouidigezh Divskouarn evit brudañ ha kas an divyezhegezh abred war raok. Klask a ra sevel ha luskañ ur rouedad gant ar gerent ha gant tud a-vicher e bed ar vugaligoù. Harpañ a ra raktresoù magourioù divyezhek ivez.

N'eus ket diwanet ur c'henlabour er vro gant Divskouarn c'hoazh. N'eus magouri ebet er vro ma vefe oberoù e brezhoneg.

### Dudi evit ar vugale

Bro Sant-Brieg zo unan eus ar broioù ma kaver ur greizenn dudi evit ar vugale. N'eus ket ur c'hinnig a-seurt-se e Gwened pe e Kemper da skouer. Staliet eo **Dudi Sant-Brieg** er vro **abaoe 1986**. Dudi zo un Greizenn Dudi Hep Herberc'h disklêriet. Kinnig a ra ar **greizenn Dudi** obererezhioù evit ar vugale da Sadorn e-kerzh ar bloavezh-skol lusket gant ur skipailh buhezourien a-youl-vat (6 buhezour zo en holl, 4 anezho gant an DABU, unan zo o prientiñ an diplom). Etre 35 ha 40 bugel zo enskrivet er greizenn-se war ar bloaz, ha war-dro 110 eurvezh a vez kinniget bep bloaz. Aet eo war-raok an niver a vugale degemeret e-keñver 2004 ma oa 25 bugel degemeret er greizenn dre vras. Stabil eo an niver-se abaoe daou pe dri bloaz. Un dra a-bouez bras eo evit reiñ tro d'ar vugale da vevañ er yezh e-maez ar skol.



### Arvestoù ha gouelioù evit ar vugale

Splet a denn skolioù divyezhek ar vro eus an troiadoù filmoù kinniget gant Daoulagad Breizh.



Abaoe 2004 e vez aozet gant **Daoulagad Breizh** ha **Dizale** troiadoù filmoù-bevaat e brezhoneg evit ar vugale. Ur c'henlabour zo etre Daoulagad Breizh ha kevredigezhioù lec'hel evit aozañ an abadennoù dre-vras. Met er vro-mañ eo aozet war-eeun gant Daoulagad Breizh, dre ma n'eus ket un emglev-bro. Gallet o deus holl skolidi divyezhek ar vro kemer perzh en obererezh-se e 2009 .

## Dudi evit an oadourien

Treut e chom ar c'hinnig er vro evit poent ha liammet eo an obererezhioù brezhonek ouzh ar sevenadur hengounel dreist-holl.

An darn vrasañ eus ar pezh a vez kinniget er vro zo aozet gant ar c'hevredigezhioù a ginnig kentelioù brezhoneg : **Nevez Amzer** e Ploufragan ha **kreizenn Abherve** e Sant-Brieg. **Berzh a ra** an abadennoù-se er vro. **Kalz tud** a vez, da skouer, en abadennoù sevenadurel (pezhioù-c'hoari, sonadegoù) aozet gant Amzer Nevez.

**Kentelioù sizhuniek Kan ha Diskan** a vez kinniget e Sant-Brieg gant ar gevredigezh **Sonerien ha Kanerien Vreizh**, abaoe 30 vloaz. Ur strollad 10 den bennak a heuilh kentelioù lusket e brezhoneg gant kanerien a-vicher. Goude un atalier emren skoazellet gant stajoù berr ez eus bet krouet div gentel en distro-skol 2009 : unan evit ar re a gendalc'h (brezhoneg ganto penn-da-benn) hag unan all evit ar re a zo nevez kroget ganti. Digor eo al live-se d'an nann vrezhonegerien, un doare evit dizoleiñ ar yezh dre ar c'han eo.

## Buhez speredel

Eskopti Sant-Brieg ha Landreger a laka ar yezh war wel dre e lec'hienn Genrouedad, enni meur a bajenn vrezhonek ; graet e vez al labour-se gant ur bodad tud a-youl vat. Savet ez eus bet gant an Eskopti ul levr oferenoù divyezhek hag a c'haller rakprenañ abaoe miz Du 2009. Kinnig a ra ar bodad skridoù an holl sakramantoù e brezhoneg diouzh ar goulenn. Oferenoù e brezhoneg a vez kinniget e bro Dreger met e bro Sant-Brieg ne vez ket.

Dre un enklask, sevenet gant kreizenn obererezh sokial kumun Sant-Brieg e 2008, ez eus deuet war wel ur goulenn oferenoù brezhonek. Un oferenn e brezhoneg e ti ar retredidi Prévallon a oa bet e Mezheven 2008, tra ken.

## Embann

**Ti-embann pennañ Breizh** zo er vro : Ti-Embann ar Skolioù. An ti hag a embann ar muiañ a levrioù brezhonek eo. 1 levr diwar bemp embannet e brezhoneg zo savet gant **TES**.

A-benn bastañ d'an ezhommoù deuet da-heul diorren rouedad ar skolioù divyezhek e oa bet savet TES e 1993 e diabarzh Kreizenn-Rannvro an Dafar Kelenn (KRDK/CRDP) gant Rannvro Breizh ha Rektorelezh akademiezh Roazhon.

Gant ar Stad e vez gopret an implijidi ; gant Rannvro Breizh e vez degaset an arc'hant evit ar mont en-dro ; gant KRDK Breizh hag he skourr eus Aodoù-an-Arvor, Kreizenn Departamant an Dafar Kelenn, e vez degaset o skiant hag an holl aveadurioù zo ezhomm evit ar mont en-dro. Skignañ a ra levrioù brezhoneg evit netra er skolioù divyezhek.

Kollet eo bet gant bro Sant-Brieg ha gant Breizh unan eus an dud ouiziekañ a oa war tachenn ar brezhoneg e 2009 : **Gwennole ar Menn**, klasker e Kreizenn vroadel an



imbourc'h skiantel. Degaset en deus ul labour divent ha frouezhus evit ar c'heriadurezh vrezhonek. Skignet eo bet e labour dre e di embann staliet e Sant-Brieg, Skol.

## Ar c'hazetennoù

Evel e 2004 e kaver pennadoù brezhonek er gelaouenn viziek **Armor Magazine**, staliet er vro e Lambal.

## Er skinwel hag er skingomz

N'eus tamm media klewelet ebet oc'h ober gant ar yezh er vro. Abadennoù brezhonek a zo bet kinniget e COB FM gant un den a-youl-vat. Chomet eo a-sav. An nevezenti a zeu eus an teknologiezhioù nevez o deus roet an tu da selaou abadennoù enlinenn; n'eo ket un dra dibar d'ar vro : un araokadenn dre-vras eo. Armor TV, bet savet war Internet gant ar c'huzul departamant a zegas ur skoazell deknikel evit produiñ an abadenn viziek brezhonek Webnoz, a dro a abadenn da abadenn dre ar pemp departamant. Evit ar pezh a sell ouzh an danvez produet gant Armor TV, hag a denn da Aodoù-an-Arvor, n'eus ket a abadennoù e brezhoneg avat.

### An teknologiezhioù nevez o harpañ ar skingomz e brezhoneg


Aesoc'h eo deuet da vezañ selaou ar programmoù brezhonek gant ar Genrouedad. Gallout a reer selaou holl brogrammoù ar skingomzoù kevredigezhel FM war-eeun enlinenn dre al lec'hienn **Stalig** abaoe miz Gwengolo 2004 ha dre **an Tour Tan** abaoe deroù 2005. Gallout a reer podskignañ peder abadenn produet gant France Bleu Breizh-Izel : “Hentoù Treuz”, “Breizh o pluriel”, an Abadenn hag ar gronikenn “Un toul ba'n avel”. Gallout a reer selaou Keleier Breizh enlinenn ivez war lec'hienn ar skingomz. Dale zo bet tapet gant ar brezhoneg e-keñver yezhoù all koulskoude. N'eus webradio ebet c'hoazh da skouer. Gallout selaou abadennoù war ar Genrouedad zo un araokadenn a-bouez evit ar broioù evel bro Sant-Brieg n'int ket goloet gant abadennoù brezhonek ar skingomzoù.

## Marc'had al labour

E-kerzh nevezamzer 2006 e oa bet savet gant an Ofis un enklask war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg*. Savet e oa bet ur c'houlennaoueg, enni tri c'hraf pennañ :

- stad an traoù d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Genver 2006 (an niver a bostoù-labour a oa warno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg),
- ar pezh a c'hellfe bezañ (an niver a bostoù a vefe mat kaout brezhonegerien warno met a zo tud divrezhonek warno),
- ar pezh a c'hellfe bezañ a-benn 2010.

Bewech ez eo an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer (KILA) eo zo bet goulennet ; kement-se a dalvez eo c'hoazh brasoc'h an niver a dud implijet, dre ma labour lod anezho darnamzer.



*Evel e Breizh dre-vras e kaver an tri c'hard eus ar postoù e bed ar c'helenn : n'eo ket ken bras pouez ar skolaerien divyezhek er vro eget e Breizh avat. Er postoù kelenn-se e kaver postoù TES hag an ESSM ivez.*

Gant **23,4 post-labour KILA brezhonek** renablet e 2006 ez eo bro Sant-Brieg an 12<sup>vet</sup> bro (diwar 19 ma 'z eus bet renablet postoù labour brezhonek) ma kaver ar muiañ a dud o labourat e brezhoneg. Bodet eo an holl bostoù-se e Sant-Brieg. Stabil eo an niver a bostoù-se er vro : moarvat eo kempouezet ar postoù krouet er c'helenn divyezhek gant ar postoù kollet evit kelenn brezhoneg evel danvez en eil derez, er skolioù prevez dreist-holl.


An darn vrasañ eus ar postoù-labour-se zo e bed ar c'helenn, evel m'emañ e Breizh a-bezh. Disheñvel eo an doare postoù memes tra : er vro, n'a ket an darn vrasañ eus ar postoù gant postoù skolaerien, ar pezh a zo disheñvel diouzh Breizh dre-vras. Implijerien bennañ ar vro eo TES (un drederenn eus ar postoù, da lavaret eo 8 post) hag an ESSM (Ensavadur Stummañ ar Vistri Skol) (4 fost).

## An armerzh

E 2001 e oa bet roet lañs d'ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg*. E miz Meurzh 2009 e oa bodet 635 a oberourien gevredigezhel hag armerzhel (hiniannoù ha frammoù nann-publik anezho) gant an Ofis, en-dro d'un dra eeun : ober muioc'h gant ar brezhoneg war ar pemdez. Ur skoazell deknikel a vez roet abaoe ar penn kentañ d'ar sinerien evit harpañ anezho en o c'hoant da ziorren plas ar brezhoneg. Kinnig a ra an Ofis d'ar sinerien kas oberoù resis da benn. Abaoe 2007 e c'hall ar sinerien mont war-zu ul label.


24 siner zo er vro (an 9<sup>vet</sup> bro eo Bro Sant-Brieg evit an niver a sinerien, a-raok bro Gwengamp (18) pe bro an Oriant (19), met gant ar memes niver ha Bro Naoned ha warlerc'h bro Roazhon (38). 2 siner ouzhpenn zo er vro e-keñver 2004 (100 siner nevez zo bet e Breizh abaoe 2004).

*Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg hervez ar gumun– Mezheven 2009*



*E Sant-Brieg emañ tost an drederenn eus ar sinerien. Koulskoude eo muioc'h digreizennet ar bed sokioarmerzhel eget hini ar c'heleñn : sinerien a gaver e reter ar vro ar pezh n'eo ket gwir evit ar c'heleñn da skouer.*

*Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg hervez ar rummad– Mezheven 2009*



*Ul lodenn vat eus sinerien Ya d'ar brezhoneg er vro - evel e Breizh dre-vras – a zeu eus bed an armerzh ; kalz anezho, er vro, zo embregerezhioù servijoù. Bihan eo plas ar c'hevredigezhioù er vro avat ; souezhus a-walc'h eo pa ouzer ez eo a-drugarez dezho e kaver brezhoneg er vro.*

Douget eo **an oberoù pleustrekañ** evit lakaat ar brezhoneg war wel (yezh labour ha yezh kehentiñ), gant hiniennoù e gwirionez, n'eus framm ebet a vije emouestlet en dra-se.



## Klozadur ar pennad war implij ar brezhoneg er gevredigezh

An abadennoù brezhonek a vez aozet gant aozadurioù kelenn d'an oadourien **a ra berzh, evel ma raent pemp bloaz zo**. Met n'int ket stank c'hoazh. Ezhomm a vefe da ginnig obererezhioù dudi ingal ha liesseurt, war skouer ar pezh a ra kevredigezhioù e broioù all : kaiak-mor e Pempoull, paintball ha filmoù sinema e Roazhon, staj hip hop e Gwengamp, pe ping-pong e Naoned. Aozañ ar Skrivadeg a vefe mat ober ivez.

Evit ar vugale ez eus ur benveg a-feson er vro gant Dudi Sant-Brieg staliet eno abaoe ouzhpenn 20 vloaz. **Dibaot eo ar seurt kreizennoù** e broioù all.

War gil eur aet avat evit frammañ ar bed kevredigezhel er vro abaoe an diagnostik kentañ. Kollet eo bet ar post-labour a oa e Telenn. Gwelet a reer an ezhomm krouiñ ur benveg dave er vro evel **Ti Bro Sant-Brieg**, evit bodañ ar c'hevredigezhioù ha luskañ ar vuhez sevenadurel brezhonek. Harp ar galloudoù foran zo ezhomm evit kas ar raktres-se da benn.

# Klozadur

**Kreskiñ a ra an niver a vugale e skolioù divyezhek S.Brieg ha labour a vez graet gant ar c'hevredigezhioù met ezvezant eo ar yezh en endro foran**

## Dibarderioù bro Sant-Brieg evit ar brezhoneg

Bro Sant-Brieg eo **ar vro ma komzer ar muiañ ar yezh e Breizh-Uhel**. Bodet ez eus kalzik a vrezhonegerien e kêr Sant-Brieg dre m'eo ur gêr-benn a zesach tud. Ne c'hoarvez ket amañ an digresk a weler e kornôg Breizh. Kresket eo an dregantad a vrezhonegerien e-touez ar rummadoù yaouankañ (s.o. sontadeg Fañch Broudig). Brasoc'h eo niver skolidi divyezhek tolpad-kêrioù S.-Brieg eget hini tolpad-kêrioù Montroulez. Gwriziennet-mat eo ar c'helenn divyezhek e Sant-Brieg : **an trede kêr pobletañ eo e Breizh evit pouez ar c'helenn divyezhek**, a-raok Kemper ha Roazhon da skouer. Er vro e kaver frammoù evit Breizh a-bezh evel **kreizenn stummañ ar gelennerien** war ar brezhoneg (ESSM), hag **embanner brasañ Breizh** (TES) evit al levrioù brezhonek. Enni ez eus ivez ur greizenn **Dudi** evit ar vugale, staliet abaoe ouzhpenn 20 vloaz ar pezh na gaver ket e Kemper nag e Gwened. Abaoe pell e gelenner brezhoneg d'an oadourien e Sant-Brieg. Kresket eo an niver a dud deuet er c'hentelioù noz e-keñver 2003 (pa'z eus bet digresk e Breizh dre-vras), daoust ma c'hallfe kreskiñ muioc'h a ma vefe ledanaet ar c'hinnig en diavaez da dolpad-kêrioù S.-Brieg.

Gounid a denn ar vro eus frammoù bet staliet enni 30 vloaz zo. Met **an oberoù a denn d'ar brezhoneg a chom douget gant ar bed kevredigezhel nemetken**. Un digempouez zo etre labour ar bed-se hag ar **strollegezhioù tiriadel ha na reont ket kont eus ar yezh** (ar gêr-benn dreist-holl daoust d'ar bodad trakêr krouet e 2004 ha d'ar vot a oa bet e 2007 evit ur panellerezh divyezhek). **E 2009, ne vez ket gwelet ar yezh er vuhez foran**. E-keit-se eo aet ar brezhoneg war-raok un tamm e pep lec'h e Breizh en 10 vloaz diwezhañ (Kastell an Duged e kêr Naoned, sinadur YAB gant kêr Roazhon, Redon, panellerezh departamant ar Mor-Bihan...). **Sinoù a-du** gant ar yezh zo bet merzet abaoe 2004 memes tra gant sinadur kentañ ar garta Ya d'ar brezhoneg er vro, gant **ti-kêr Porzhig**.

Aet eo ar c'helenn divyezhek war-raok, met dre ma chom kreizennet ar c'hinnig er gêr-benn ne gresk ket implij ar yezh er vro evel ma c'hallfe. N'eo ket emdroet nemeur ar c'hinnig e-keñver 2004, ne c'haller ket deskiñ brezhoneg c'hoazh e reter ar vro. **Krouiñ lec'hioù nevez** eo an diskoulm evit kempouezañ an traoù er vro, evit harpañ kresk ar c'helenn divyezhek hag evit boueta an hentad publik nevez krouet en eil derez.

Sac'het eo chomet an traoù er vro ha ne greskont ket evel ma c'hallfent ober evit ar c'helenn divyezhek da skouer.



# Derc'hel soñj...

## Sifrou pennañ ar brezhoneg e bro Sant-Brieg

- **Etre 5 000 ha 6 000 yezher e 2009.**
- **Ar vro gentañ eo e Breizh-Uhel evit feur ar yezherien**
- **245 skoliad** a heuilh kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise.
- Kenderc'hel a ra ar c'helenn divyezhek er skolaj e Sant-Brieg abaoe distro-skol 2008.
- An trede kêr e Breizh eo Sant-Brieg evit an dregantad a vugale en he hentadoù divyezhek (e-touez an dek kêr pobletañ).
- Kresket eo ar boblañs skol divyezhek eus 39% etre an daou ziagnostik (distro-skol 2003 ha distro-skol 2009)
- N'eus ket tu ken da zeskiñ brezhoneg evel danvez dibab e skolajoù Sant-Brieg.
- Ur greizenn-dudi e brezhoneg zo e Sant-Brieg.
- **Kreizenn stummañ ar gelennerien** vrezhonek zo er vro en **ESSM** Sant-Brieg.
- Embanner brezhonek brasañ Breizh zo er vro : **TES** hag a embann 20% eus an titloù brezhonek embannet bep bloaz.
- **90 den deuet** a zesk brezhoneg dre ar c'hentelioù noz.
- Ur gumun he deus sinet ar garta Ya d'ar brezhoneg : Porzhig
- **23,5 post-labour brezhonek** KILA a oa bet renablet e 2006.
- 24 oberour kevredigezhel hag armerzhel eus ar vro o deus sinet **Ya d'ar brezhoneg ; niverusoc'h int er vro-mañ eget e bro Gwengamp da skouer.**

## Ar brezhoneg en deskadurezh

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Sant-Brieg eo <b>trede kêr pobletañ Breizh</b> evit pouez ar c'helenn divyezhek.</li> <li>▪ Kenderc'hel a ra ar c'helenn divyezhek <b>er skolaj</b> publik abaoe distro-skol 2008.</li> <li>▪ <b>Kreizenn stummañ ar gelennerien</b> zo er vro.</li> <li>▪ <b>Skourr Sant-Brieg Skol-Veur Breizh-Uhel</b> a ginnig un danvez dibab brezhoneg abaoe 2004.</li> <li>▪ Gwriziennet eo ar c'helenn d'an oadourien er vro abaoe 40 vloaz.</li> <li>▪ E Sant-Brieg ez eus kement a dud deuet o teskiñ hag e Lannuon pe Gwened .</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ An diouer a lec'hioù nevez krouet a vir ouzh ar c'helenn brezhonek da greskiñ er vro evel ma c'hallfe ober.</li> <li>▪ <b>Re greizennet</b> eo ar c'helenn e-kreiz ar vro c'hoazh.</li> <li>▪ Div gumun diwar 64 hepken a ginnig ur c'helenn divyezhek.</li> <li>▪ Aet eo ar vro war gil evit ar c'hentelioù en eil derez.</li> <li>▪ Kollet eo bet post-labour Telenn, un dra fall evit ar c'helenn d'an oadourien.</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Politikerezh ar Rektorelezh evit ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez : Techet eo da <b>serriñ ar c'hentelioù</b> en eil derez</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ <b>Digeriñ lec'hioù nevez</b> evit kempouezañ ar c'helenn er vro, reiñ lusk en-dro ha boueta an hentad digoret er skolaj.</li> <li>▪ <b>Harpañ ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez, un</b> hent a bouez evit stummañ danvez kelennerien.</li> <li>▪ Brudañ an danvez dibab er skol-veur, un hent evit danvez kelennerien.</li> <li>▪ Krouiñ <b>Ti Bro Sant-Brieg</b> evit kenurzhiañ ha diorren ar c'helenn d'an oadourien : tu zo da grouiñ kentelioù noz er-maez eus Sant-Brieg.</li> </ul>

## Ar brezhoneg er vuhez foran

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ <b>Sinadur kentañ Ya d'ar brezhoneg</b> er vro e Du 2008 gant ti-kêr <b>Porzhig</b>.</li> <li>▪ Prest eo ar gevredigezh da ziorren ar yezh er vuhez foran (s.o sontadeg TMO-Fañch Broudic).</li> <li>▪ Politikerezh tiriadel <b>Rannvro Breizh</b> hag a vroud ar broioù <b>d'ober gant ar yezh</b>.</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ An departamant a ouestl d'ar brezhoneg <b>ar budjed izelañ</b> dre yezher eo <b>departamant Aodoù-an-Arvor</b>.</li> <li>▪ <b>N'eus bet gwelet disoc'h pleustrek</b> ebet evit ar yezh er vuhez foran e Sant-Brieg da-heul divizoù an ti-kêr (Gouere 2004 : krouiñ ur bodad trakêr ; 2007 : vot evit ur panellerezh divyezhek).</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Diviz KD 22 e 1984 da chom hep staliañ ur panellerezh hent divyezhek e reter an departamant.</li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Lakaat <b>ti-kêr Sant-Brieg</b> da <b>sinañ Ya d'ar Brezhoneg</b> : evit embann e youl da lakaat ar yezh war wel er vuhez foran.</li> <li>▪ Astenn <b>d'an departamant a-bezh</b> ar panellerezh-hent divyezhek.</li> </ul>

## Ar brezhoneg er vuhez keodedel

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ <b>Ar vro ma komzer ar muiañ ar yezh e Breizh-Uhel</b>.</li> <li>▪ <b>Dudi Sant-Brieg</b> : ur benveg a-feson, hep e bar e broioù all</li> <li>▪ <b>Berzh</b> an abadennoù brezhonek aozet er vro gant <b>ar c'hevredigezhioù</b>.</li> <li>▪ <b>Ti embann brezhonek brasañ Breizh</b> er vro : <b>TES</b></li> </ul>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Kreizennet eo pep tra e Sant-Brieg ha Ploufragan</li> <li>▪ Koll post-labour Telenn</li> <li>▪ Ne vez ket ingal abadennoù kinniget d'an dud deuet.</li> <li>▪ Media brezhonek ebet er vro.</li> <li>▪ Lec'h degemer ebet evit bed ar vugaligoù.</li> <li>▪ Ezhomm harp a-berzh ar strollegezhioù lec'hel</li> </ul>	<p>Dibenn ar reizhiad implijoù yaouank (s.o post labour Telenn)</p>	<ul style="list-style-type: none"> <li>▪ Digeriñ <b>Ti Bro Sant-Brieg</b> evit luskañ ha diorren ar vuhez sevenadurel vrezhonek er vro</li> <li>▪ Kinnig obererezhioù liesseurt d'an dud.</li> </ul>

# Ar gallaoueg e bro Sant-Brieg

## Ar c'hallaouegerien

Diaes eo priziañ an ober gwirion gant ar gallaoueg er gevredigezh, rak ne vez ket emskiantek ar c'hallaouegerien atav ez eo gallaoueg a gomzont. Ispriziet e c'hall bezañ bet an niver a yezherien neuze. Diaesoc'h eo an ober da briziañ peogwir e c'hall cheñch ar c'hallaouegerien ingal etre ar gallaoueg hag ar galleg e-kerzh ar memes kaozeadenn.


Degaset en doa an enklask kaset da benn gant an EBSSA e 1999 roadennoù diwar-benn an ober gant ar gallaoueg e-touez an oadourien, dre oad ha dre lec'h annez da skouer. Renablet ez eus en tu all da 32 000 yezher deuet d'o oad e Breizh. Disheñvel eo an ober diouzh al lec'h annez. E lodenn reter Aodoù-an-Arvor emañ feur ar yezherien er boblañs en e uhelañ. Un tamm uheloc'h eo dregantad ar yezherien er boblañs eno (2,4%) eget en Il-ha-Gwilen (2%) Diwar an elfennoù-se e c'haller istimañ an niver ar c'hallaouegerien e-tro 4 500 yezher well-wazh e 1999 e bro Sant-Brieg.


Evel evit ar brezhoneg, koshaat a ra an dud a gomz gallaoueg. En tu all da 50 vloaz e oa an tri c'hard anezho e 1999 c'hoazh ha tost an hanter a oa koshoc'h eget 65 bloaz e 1999. 10% a oa dindan 30 vloaz hepken. Diouzh roadennoù an EBSSA dre oad e c'haller brasjediñ e vefe ouzhpenn 25 000 den a gomzfe gallaoueg e Breizh e 2009. Diskennet eo feur ar yezherien e lodenn reter Aodoù-an-Arvor a-dra-sur abaoe 1999 (nebeutoc'h eget 2%). Gallout a reer jediñ e sav etre **3 500 ha 4 000** an niver a yezherien e bro Sant-Brieg bremañ.

## Ar c'helenn er skol

N'eus kentel gallaoueg ebet er c'hentañ derez nag er skolaj. Diwar an 10 lise zo er vro n'eus nemet lise publik **Lambal** hag a ginnig kentelioù. Abaoe 5 bloaz eo chomet heñvel ar c'hinnig. N'eus tamm kinnig ebet er c'helenn prevez.

*An niver a skolidi er c'hentelioù gallaoueg -Bloavezh 2009/2010*





War-dro 20 lisead a heuilh kentelioù gallaoueg e bro Sant-Brieg, da lavaret muioc'h eget 5 bloaz zo (10 lisead). Met betek 30 lisead oa bet e 2006 ha tuet eo an niver-se da ziskenn abaoe, evel en departamant hag e Breizh dre vras.

E-touez ar skolioù m'emañ an niver a skolidi en e izelañ eo lise Lambal e Breizh. Gant ul lec'hiad hepken emañ bro Sant-Brieg e-touez ar broioù m'eo ar c'helenn diorroet an nebeutañ.

## Kelenn d'an oadourien

N'eus ket kentelioù da zeskiñ gallaoueg er vro. Kinnig a ra Ofis retredidi Sant-Brieg stalioù-labour kaozadennoù e gallaoueg bep pemzektez evit an dud o deus c'hoant da zerc'hel gantañ.

## Buhez foran

Evel el lec'hioù all e Breizh, ne weler ket kalz ar gallaoueg er vuhez foran met da heul vot karta Ya d'ar brezhoneg kinniget gant an Ofis he deus kumun Porzhig staliet pannelloù mont-tre ha mont-maez e brezhoneg, galleg ha gallaoueg. Ar re gantañ er vro.

## Buhez sevenadurel

Aozañ a ra skourr Bertaèyn Galeizz Aodoù-an-Arvor lec'hiet e Lambal ur sizhunvezh gouestlet d'ar gallaoueg abaoe 2003, *Gallo en scène*. Kontadennoù, pezhioù c'hoari e gallaoueg a vez kinniget. Berzh a ra an darvoud-mañ zo e-touez darvoudoù pennañ ar vuhez sevenadurel gallaouek.

Kinnig a ra ar strollad "les Préchous", diazezet e Loudieg, pezhioù c'hoari e gallaoueg er vro, evel e Erge-ar-Mor e Du 2009 pe e Henon e Ebrel 2010 da skouer.

## Bihan eo plas ar gallaoueg er vro

Koshaat a ra an dud a gomz gallaoueg diskennet eo an niver a dud a gomz abaoe roadennoù diwezhañ 1999. Chom a ra diaes priziañ an ober gant ar gallaoueg dre ma ne vez ket emskiantek ar c'hallaouegerien atav ez eo gallaoueg a gomzont.

Bihan eo chomet plas ar gallaoueg er c'helenn c'hoazh; n'eus nemet e Lambal e c'haller deskiñ gallaoueg er skol. Souezhus eo stadañ ne ginnig lise ebet eus Sant-Brieg kentelioù gallaouek c'hoazh. Tuet eo an niver a skolidi da ziskenn abaoe 2006 ha n'eus bet araokadenn ebet war dachenn ar c'hentelioù kinniget er vro. Aet eo un tamm war-raok war dachenn ar vuhez foran gant ar panneloù bet staliet e Porzhig a-drugarez da sinadur Ya d'ar brezhoneg. Deuet ez eus traoù nevez war dachenn ar vuhez sevenadurel diwar atiz ar bed kevredigezhel ivez, gant ar festival "Gallo en scène", un darvoud a-bouez e Breizh.

Ezhomm a vefe da gaout da nebeutañ ur skol eil derez o kelenn gallaoueg e Sant-Brieg, anezhi kêr-benn ar vro hag an departamant. Ur pal a c'hallfe bezañ evit ar vro.

# Stagadennoù

Sifroù ar c'heleñn divyezhek hervez ar gumun hag al live - Distro-skol 2009

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Skolaj	Lise	Hollad
Sant-Brieg	77	89	14	0	<b>180</b>
Tregaeg	6	13	0	0	<b>19</b>
<b>Bro Sant-Brieg</b>	<b>83</b>	<b>102</b>	<b>14</b>	<b>0</b>	<b>199</b>

Sifroù ar c'heleñn divyezhek hervez ar gumun hag an hentad - Distro-skol 2008

	Diwan	Publik	Prevez	Hollad
Sant-Brieg	89	91		<b>180</b>
Tregaeg			19	<b>19</b>
<b>Bro Sant-Brieg</b>	<b>89</b>	<b>91</b>	<b>19</b>	<b>199</b>

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek

	1999	2000	2001	2002	2003	2004	2005	2006	2007	2008	2009
Sant-Brieg	89	120	134	137	143	150	164	171	159	176	180
Tregaeg						26	45	39	26	23	19
Bro Sant-Brieg	89	120	134	137	143	176	209	210	185	199	199

Feurioù ar c'heleñn divyezhek hervez ar gumun hag al live - Distro-skol 2008

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Ishollad kentañ derez	Skolaj	Lise	Hollad
Sant-Brieg	<b>4,2%</b>	<b>3,8%</b>	<b>4%</b>	<b>0,2%</b>	<b>0</b>	<b>1,1%</b>
Tregaeg	<b>1,8%</b>	<b>3,3%</b>	<b>2,7%</b>	<b>0</b>	<b>0</b>	<b>2,7%</b>
Bro Sant-Brieg	<b>0,9%</b>	<b>0,9%</b>	<b>0,9%</b>	<b>0,1%</b>	<b>0</b>	<b>0,5%</b>

Feur ar c'heleñn divyezhek hervez ar gumun hag ar bloavezh er c'hentañ derez

	1999	2000	2001	2002	2003	2004	2005	2006	2007	2008
Sant-Brieg	1,8%	2,5%	2,9%	3,0%	3,2%	3,4%	3,7%	3,8%	3,70%	4%
Tregaeg						3,2%	5,4%	4,5%	3,13%	2,7%
Bro Sant-Brieg	0,5%	0,6%	0,7%	0,7%	0,7%	0,9%	1,0%	1,0%	0,9%	0,9%

*Emdroadur an niver a skolidi e kentelioù brezhoneg an eil derez*

	2004	2005	2006	2007	2008	2009*
Skolajoù publik	13	15	7	5	0	0
Lisoù publik	31	35	9	10	9	9
Liseoù prevez	13	3	17	49	37	32
<b>Bro Sant-Brieg</b>	<b>57</b>	<b>53</b>	<b>33</b>	<b>64</b>	<b>46</b>	<b>41</b>

\* Rakweladennoù gant Rektorelezh Roazhon

*Emdroadur an niver a skolidi e kentelioù brezhoneg an eil derez hervez ar gumun*

	2004	2005	2006	2007	2008	2009*
Kintin	44	50	16	15	9	9
Sant-Brieg	13	3	17	49	37	32
<b>Bro Sant-Brieg</b>	<b>57</b>	<b>53</b>	<b>33</b>	<b>64</b>	<b>46</b>	<b>41</b>

*Sifroù ar c'hentelioù noz hervez ar gumun hag al live e 2009/2010*

	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5	Hollad
Ploufragan	6	10	13			<b>29</b>
Sant-Brieg	18	9	10	12	14	<b>63</b>
<b>Bro Sant-Brieg</b>	<b>24</b>	<b>19</b>	<b>23</b>	<b>12</b>	<b>14</b>	<b>92</b>

# Levrlennadur

- BAUDEQUIN I., Genver 2008. L'évolution de la population des 21 pays bretons de 1999 à 2005. Octant, Roazhon, 111, 17-21.
- BROUDIC Fañch, Meurzh 2009, Parler breton au XXIe siècle, le nouveau sondage de TMO-Régions, Emgleo Breiz, 208 p.
- EBSSA (emb.), Gwengolo 2003. L'espace breton. Les dossiers d'Octant, Roazhon, 45, 152 p.
- GREF Breizh (emb.), Mezheven 2007. Tableau de bord emploi-formation par pays - du pays de Saint-Brieuc. Roazhon, 44 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2007. Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour – Eil danevell hollek war stad ar brezhoneg. Roazhon, 135 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. Diagnostik war stad ar brezhoneg e bro Sant-Brieg Roazhon, 18 p.
- Ofis ar Brezhoneg, 2009 Recrutement et formation des enseignants bilingues, état des lieux et perspectives, 54 p.

# Mammennoù

- Bro Sant-Brieg
- Daoulagad Breizh
- Deskadurezh Stad
- Dihun
- Div Yezh
- Diwan
- Ensellerezh akademiezh Aodoù-an-Arvor
- ESSM
- France 3 Ouest
- France Bleu Breizh Izel
- Kreizenn Sevenadurel Abherve
- Nevez Amzer
- Rannvro Breizh
- Rektoriezh Roazhon
- TES